


# AR GOZ - AMZER

*Andantino (quasi andante).*



Man-tel ar goz am-zer war ar bed a zis-ken, Ar



c'hoat en eus gwis-ket e zil - had aour



me - len, E zil - had aour me - len.

Mantel ar goz-amzer war ar bed a zisken,  
Ar c'hoat en deus gwisket e zilhad aour melen.

Ar winidel digar ' zo nijet da bell-bro,  
Labouset Breiz a gan o diwezan zonio.

Prestik an avel-yud a denio, gant kounnar,  
Da zistag, hep true, pep delien diouz he barr.

Dirak ar gouarnv kalet, joa ar meaziou a dec'h,  
Mes kalon ar Breizad ' zo laouen ha dinec'h.

Serret mad eo an est ha klozet er zolier,  
Bara war ar planken, big sal ouz an treustier.

Glevet ket er c'harti c'hoarzagadeg ha zonio,  
Pôtrez o c'houtellat 'n eur valan avalou ?

Diouvrec'h krenv ha nerzus a stard war an dor,  
[chen.

Ar jistr en eur drouzal a ruilh er variken.

Na brao a vo bemnoz, 'tal an tan, klozet mad,  
'N eur dibri kistin tom, evet eur skudellad.

Pegen dranteo tremen nozvejou hirr ar gouan,  
Luskellet, 'n eun ti zoul, gant trouz ar c'harr  
[nean !

Ar vugale youstan, war vord o gweleou,  
Yann-grenn 'n eur c'hornik kloz, 'tal pôtr ar  
[marvailhou.

Skabel ar vignoned renket er plas kentan,  
An avel o trouzal hag ar skrill o kanan...

Leur an ti goloet gant plouz ar ruskennou,  
Ar merc'hed o c'hourdrouz pôtrez ar sklabeou.

Hag ar skullad jistr tomm, mammen allevenez,  
Oc'h ober, hep ehan, tro ar gompagnunez.

Setu perak e trid kalon al labourer,  
Pa wel an del melen o nijal dre an ér.

Peb amzer, war ar mêz, an eus e levenez,  
En Breiz n'eus ket a lec'h 'vit an dristidigez.